

Chabistr 1

Seiz miz a oa, deiz-ha-deiz, e oa bet skoet treizhidi ar baloñs war an Enez Lincoln. Abaoe ar c'houlz-se, ne vern pe glask o doe graet, ne oa deuet den d'en em ziskouez dezhe. Biskoazh ne oa bet diskuliet den gant ur banne moged war c'horre an enezenn. Biskoazh ne oa bet kadarnaet e oa deuet tud gant nep labour dorn, na gwechall-gozh, na nevez zo. Neket hepken ne hañvale ket bezañ annezet, met da grediñ e oa ne oa bet biskoazh. Ha, bremañ, setu ma kouezhe ar chafod dezreadurioù dirak ur c'hreunenn vetal ordinal, kavet e korf ur c'hrigner dizrouk !

Bez' e oa bet tennet ar blomenn-se end-eeun eus un arm dan, ha piv estreget un den en dije gallet ober gant an arm ?

Pa voe bet lakaet ar blomenn war an daol gant Pencroff e sellas e gompagnuned outi gant souezh bras. Skoet e oa bet trumm o spered gant holl heuliadoù an darvoud, a-bouez daoust ma seblante bezañ dister. Ne vijent ket bet estlammetoc'h ma vije deuet ur boud dreistnatur war wel a-daol-krenn.

Ne dortas ket Cyrus Smith evit sevel da gentañ ar goulakadurioù a zleje dont da-heul ar fed-se, ken souezhus

ha dic'h ortoz. Kemer a reas ar blomenn, he zreiñ-distreiñ a reas, he dastornat a reas etre e viz-meud hag e viz-yod. Goude :

— Hag e-tailh emaoç'h da asuriñ, a c'houlennas digant Pencroff, e oa a-vec'h tri miz oad, ar pekari bet gloazet gant ar blomenn-mañ ?

— A-vec'h, Aotrou Cyrus, a respontas Pencroff. O tenañ e vamm e oa c'hoazh pa 'm boa e gavet er foz.

— Hama, eme an ijinour, gant se eo prouet penaos, tri miz zo d'ar muiañ, ez eus bet laosket un tenn-fuzuilh en Enez Lincoln.

— Ha penaos ur blomenn, a ouzhpennas Gedeon Spilett, he deus tizhet, hep e lazhañ, al loen bihan-mañ ?

— N'eus na mar na marteze, a eilgerias Cyrus Smith, ha setu ar pezh a c'haller dezastum diwar an darvoud-se : pe e oa annezet an enezenn kent dimp erruout, pe ez eus bet tud o tilestrañ enni abaoe tri miz d'ar muiañ. Hag a-ratozh pe diratozh eo degouezhet an dud-se, dre zilestrañ pe dre beñseañ ? Ne c'halla ar c'hraf-se bezañ sklaeraet nemet diwezhatoc'h. Evit petra int, Europiz pe Maleziz, enebourien pe mignoned d'hor gouenn, n'eus netra hon lakafe d'en divinout, ha m'emaint c'hoazh o chom en enezenn, pe aet kuit e vefent, ne ouzomp ket kennebeut all. Ar goulennou-se avat a sell ouzhimp kalz re eun evit ma chomfemp en entremar pelloc'h.

— Ket ! Kant gwech ket ! Seizh kant gwech warn-ugent ket ! a grias ar martolod en ur sevel diouzh taol. N'eus den all ebet estregedomp en Enez Lincoln ! Tri mil diaoul ! N'eo ket an enezenn ken bras-se, ha, ma vefe bet annezet, hor befe merzet c'hoazh unan bennak eus he annezidi !

— Ar c'hontrol, end-eeun, a vefe gwall souezhus, eme Harbert.

— Kalz souezhusoc’h e vefe avat, me ’gav, a zisklêrias ar c’helaouer, e vefe bet ganet ar pekari-mañ gant ur blommenn en e gorf !

— Panevet, eme Nab gant parfeted, n’en defe bet Pencroff...

— Biskoazh c’hoazh, Nab, a eilgerias Pencroff diouzhtu-dak. Bez’ em befe bet, hep gouzout din, abaoe pemp pe c’hwec’h miz hepdale, ur blommenn em c’harvan ! Pelec’h avat e vefe en em guzhet ? a ouzhpennas ar martolod, o tigeriñ e c’henoù en doare da ziskouez an daou zant kaer ha tregont a oa ennañ. Sell mat, Nab, ha ma kavez un dant kleuz er rastellad-mañ ez lezan da dennañ un hanter dousennad anezhañ !

— Ne c’hallomp ket degemer goulakadur Nab, endeeun, a respontas Cyrus Smith, na c’hallas ket, daoust d’e soñjoù sirius, moustrañ war ur mousc’hoarzh. Sur eo ez eus bet laosket un tenn en enezenn, tri miz zo d’ar muiañ. Douget e vefen da soñjal n’emañ amañ ar re bennak, hag o deus douaret war an aod-mañ, nemet abaoe nebeuttre a amzer zo pe n’o deus graet nemet tremen, rak ma vije bet annezet, d’ar c’houlz ma oamp oc’h ergerzhout an enezenn eus krec’h Menez Franklin, gwelet hor bije kement-se pe gwelet e vijemp bet. Bez’ e c’hallfe bezañ eta e vefe bet skoet peñseidi, un nebeud sizhunioù zo, gant ur barrad gwallamzer un tu bennak war an aod. Bezet pe vezet, dav eo dimp ober ur soñj resis war ar c’hraf-se.

— Me a gav din e rankomp ober gant evezh, eme ar c’helaouer.

— Ma soñj eo ivez, a eilgerias Cyrus Smith, rak da zoujañ zo siwazh ez eo morlaeron valeziat hag a zo diles-tret en enezenn !

— Aotrou Cyrus, a c’houlennas ar martolod, ne vefe

ket dereat, a-raok mont da welet, sevel ur c'hanod hag a rofe an tu dimp pe da sevel gant ar stêr, pe diouzh ret da ober tro an aod ? Arabat e vefe dimp bezañ tapet berr.

— Mat eo ho mennozh, Pencroff, eme an ijinour, met ne c'hallomp ket gortoz. Hogen, ur miz a vefe ezhomm da nebeutañ evit sevel ur c'hanod...

— Ur gwir ganod, ya, a respontas ar martolod, met n'hon eus ket ezhomm eus ur vagig da zalc'her war ar mor, ha, dindan pemp devezh d'ar muiañ e vefen e-tailh da sevel ur birogenn solut a-walc'h evit bageal war ar Mercy.

— Dindan pemp devezh, a grias Nab, aozañ ur vag ?

— Ya, Nab, ur vag diouzh mod an Indianed.

— E koad ? a c'houlennas ar morian amgredik.

— E koad, a respontas, pe kentoc'h e rusk. Adlavaret a ran deoc'h, Aotrou Cyrus, e c'hall an afer bezañ graet dindan pemp devezh !

— Dindan pemp devezh, evel-se bezet graet ! a lavaras an ijinour.

— Ac'hann da neuze avat e vo dav dimp en em ziwall strizh ! eme Harbert.

— Strizh-strizh, mignoned, a eilgerias Cyrus Smith, hag ho pediñ a rafen da vevenniñ hoc'h abadennoù chaseal e trowardroioù Greunit House.

Echuiñ a reas koan tristoc'h eget n'en doa spiet Pencroff.

Evel-se eta e oa annezet pe bet e oa gant tud all estreget an drevadennerien. Abaoe darvoud ar blomenn e oa ur fed diarvar, ha ne c'halle an drevadennerien nemet bezañ ankeniet-bras da-heul un hevelep diskuliadenn.

Cyrus Smith ha Gedeon Spilett, kent en em reiñ d'an diskuizh, a zivizas e-pad pell diwar-benn an traoù-se.

Goulenn a rejont oute o-unan ha ne vefe ket liammet, dre zegouezh, an darvoud-se ouzh an doare, na c'halled ket displegañ, ma oa bet saveteet an ijinour ha traoù souezhus all e oant bet skoet gante meur a wech. Koulskoude, goude bezañ sellet eil tu ar c'hraf-se hag egile, e lavaras a-benn ar fin :

— A-barzh fin ar gont, Spilett kaezh, c'hoant hoc'h eus da c'houzout ma soñj ?

— Ya, Cyrus.

— Hama, sed aze : ha pa ergerzhfemp pizh an enezenn, ne gavfemp netra.

Kerkent hag an deiz war-lerc'h e stagas Pencroff gant e labour. Ne oa ket anv a sevel ur c'hanod koadoù-kamm, bordajenn hag all, met ur skaf strad sklat, hag a vije a-feson evit merdein ar Mercy, dreist-holl tost d'he mammenn, el lec'h ma ne vije ket don an dour anezhi. Ruskennoù gwriet an eil ouzh eben a dleje bezañ trawalc'h evit frammañ ar gouc'henn skañv, ha ma vije ret he dougen, abalamour da skoilloù naturel, ne vije na pounner na landrammus. Pencroff a oa e-sell stummañ gwri ar bandennoù rusk gant tachoù riñvet, hag asuriñ, gant o fegusted, peurstankadur ar skaf.

Ret e oa dibab eta gwez hag a vije mat o rusk, gwevn ha pegus evit seurt labour. Hogen, dres a-walc'h, ar gorventenn ziwezhañ he doa diskaret ur c'hementad bras a wez douglas, hag a zeree mat-tre da seurt bigi. Ledet e oa un nebeud re eus ar sapin-se war an douar, ha ne oa nemet o diruskañ d'ober, met aze e voe ar pep diaesañ, pa oa dibarfet benvegoù an drevadennerien. E berr gomzoù, kaset e voe al labour da benn.

Tra ma oa ar martolod, eilet gant an ijinour, gant al labour-se, hep koll un eur, ne vanas ket Gedeon Spilett

hag Harbert arwarek. Graet o doa pourvezerien an drevadenn anezhe. Ne skuizhe ket ar c'helaouer o sellet ouzh ar paotr yaouank hag a oa deuet da vezañ ampart-kenañ en embregañ ar wareg pe ar gouzifiad. Harbert a ziskoueze ivez bezañ hardizh bras, gouzout a rae chom difrom, ar pezh a c'hallfed ober "poell ar gadarnded". An daou gompagnun chaseal, pa zalc'hent kont eus erbedadennoù Cyrus Smith, ned aent ket pelloc'h eget war-hed daou viltir tro-dro Greunit House, met dinaouioù kentañ ar c'hoad a roe trawalc'h a agoutied, a gabiaied, a gangouroued, a bekaried, h.a., ha ma ne zeue ket nemeur a dra diwar an trapoù abaoe ma oa torret ar yenien, d'an nebeutañ e roe ar waremm he c'hementad kustum, hag a c'hallje boueta holl drevadenn Enez Lincoln.

Alies, e-pad ar chaseadennoù e kaozee Harbert gant Gedeon Spilett diwar-benn darvoud ar blomenn, hag an heuliadoù dastumet diwarnañ gant an ijinour, hag un deiz – ar 26 a viz Here a oa – e lavaras dezhañ :

— Koulskoude, Aotrou Spilett, ne soñjit ket ez eo burzhudus-tre, ma vefe douaret peñseidi en enezenn, ne vefent ket en em ziskouezet c'hoazh kostez Greunit House ?

— Souezhus-tre, m'emaint enni c'hoazh, a respontas ar c'helaouer, met tamm souezhus ebet, ma n'emaint ket enni ken !

— Evel-se, soñjal a rit eo aet an dud-se kuit eus an enezenn c'hoazh ? a lavaras Harbert.

— Sur a-walc'h, ma faotr, rak ma vefe padet o chomadenn enni, ha dreist-holl ma vefent enni c'hoazh, diskuilhet e vefe bet o bezañs gant tra pe dra.

— M'o deus gallet mont kuit avat, eme ar paotr yaouank, ne oant ket peñseidi ?

— Nann, Harbert, pe, da nebeutañ, e oant ar pezh a rafen peñseidi da c’hortoz anezhe. Bez’ e c’hallfe bezañ, end-eeun, e vefent bet taolet en enezenn gant ur barrad avel, hep na vefe bet direnet o lestr, ha penaos, ur wech torret an avel, e vefent aet war vor adarre.

— Ret eo anzav un dra, eme Harbert, eo e seblante an Aotrou Smith doujañ muioc’h eget c’hoantaat na vefe tud war hon enezenn.

— Gwir eo, a respontas ar c’helaouer, d’e veno n’eus nemet Maleziz a c’hallfe daremprediñ ar morioù amañ, hag an aotrounez-se zo lamponed fall a zo gwell chom pell dioute.

— Posupl a-walc’h eo, Aotrou Spilett, a gendalc’has Harbert, e kavfemp, deiz pe zeiz, roudoù eus o dilestrañ, ha marteze ne vano douet ebet ken war ar c’hraf-se ?

— Ne lavaran ket ne c’hallfe ket bezañ, ma faotr. Ur c’hamp dilezet, un tantad lazhet, a c’hallfe hol lakaat war o hent, ha setu ar pezh a glaskimp en hon ergerzhadenn gentañ.

An deiz ma oa an daou chaseour o kaozeal evel-se e oant en ul lodenn eus ar c’hoad nes d’ar Mercy, heverk gant gwez kaer-meurbet. Aze, e-mesk re all, e save betek daou c’hant troatad uhelder war-bouez nebeut a-us d’an douar, un nebeud eus an avalpineged hollgaer a vez graet “kaouri” anezhe gant henvroidi Zeland-Nevez.

— Ur soñj zo deuet din, Aotrou Spilett, eme Harbert. Ha ma pignfen betek bleñch unan eus ar pin-kaouri e c’hallfen sellet ouzh ar vro war-hed pell a-walc’h ?

— Mat eo ho soñj, a respontas ar c’helaouer, met gallout a ri krapat betek bleñch unan eus ar ramzed-se ?

— Emaon o vont da glask ober bepred, a respontas Harbert.

Ar paotr yaouank, ouesk ha barrek, a savas a-dizh war ar brankoù kentañ lakaet en un doare a aesae pignat gant ar binenn-gaouri, ha, dindan un nebeud munutennoù, e oa degouezhet he bleñch hag a zifouke diouzh ar blae-nenn c'hlasvez divent stummet gant barradur kromm ar c'hoad.

Eus al lec'h uhel-se e c'halle e selloù tapout, en he fezh, lodenn greisteiz an enezenn, eus Kab ar Skilf, er gevred, betek Penn-tir ar Stlejvil, er mervent.

Harbert avat, eus e arvestlec'h uhel, a c'halle sellet just a-walc'h ouzh al lodenn dianav-se eus an enezenn en he fezh, hag he dije gallet reiñ bod pe hag a roe bod d'an estrenien o doa disfiz e oant aze.

Sellet pizh a reas ar paotr yaouank. Ouzh ar mor da gentañ, netra da welet. Lien ebet, nag en dremmwel, na war douaraj an enezenn. Koulskoude, pa oa kuzhet an arvor gant ar c'hoadeg, e c'hallje ul lestr, dreist-holl unan diwern, bezañ bet aochet a-dost-kaer, ha, dre-se, bezañ bet en disgwel diouzh Harbert.

E-kreiz koad ar Far-West, netra kennebeut. Ar c'hoad a oa e stumm ur volz didreuzus, meur a vilier metrad karrez enni, hep frankizenn ebet, hep banne gouloù ebet. Ne c'halled ket heuliañ red ar Mercy zoken gant ar sell nag anavezout beg ar menez ma oa hec'h andon. Marteze e rede gwazhioù all etrezek ar c'hornaoueg, met ne oa netra evit kadarnaat kement-se.

Koulskoude avat, ma ne wele Harbert roud ebet eus ur c'hamp bennak, daoust ha ne c'halle ket diskoachañ en aer ur vogedenn hag a ziskuilhfe bezañs tud ? Glann e oa an aergelc'h, hag anat e vije bet an disterañ aezhenn war skramm an oabl.

E-pad ur par berr e kredas Harbert gwelet ur vogedenn

skañv o sevel er c'hornaoueg, met en ur sellet pishoc'h e welas e oa faziet. Gant kalz a aked e sellas, ha lemm-tre e oa e zaoulagad... Ne oa netra na ne oa.

Harbert a ziskennas betek troad ar wezenn-gaouri, ha mont a reas an daou chaseour en-dro da Greunit House. Eno e selaouas Cyrus Smith danevell ar paotr yaouank, hejañ e benn ha ne rannas grik. Anat e oa ne c'halljed ober ur soñj war ar c'hraf-se nemet goude bezañ ergerzhed an enezenn a-bezh.

An eil antronoz – 28 a viz Here – e c'hoarvezas un darvoud all, hag a chomje dizispleg c'hoazh.

En ur straniñ war an aod, daou viltir diouzh Greunit House, o doe Harbert ha Nab chañs vat a-walc'h da dapout ur standilhon eus genad ar gelonianed. Ur vaot c'hlas e oa eus doare *mydas*, adskedoù glas-gwer kaer-meurbet war he c'hrogenn.

Harbert a spurmantas ar vaot a oa o'n em silañ e-touez ar reier evit tizhout ar mor.

— Sikour, Nab, sikour ! a grias.

Nab a zeredas.

— Kaerat loen ! eme Nab, penaos e dapout avat ?

— Netra aesoc'h, Nab, a respontas Harbert. Emaomp o vont da dreiñ ar vaot-se a-led he c'hein, ha ne c'halllo ket mui tec'hout kuit. Krogit en he speg ha grit evel don.

Ar stlejvil, santet an dañjer gantañ, a oa en em dennet etre e glorenn hag e betral. Ne weled ket nag e benn, nag e bivioù, ha mot-mik e oa.

Harbert ha Nab a lakaas neuze o bizhier dindan glerenn al loen, hag, o labourat a-gevret, e teujont a-benn, gant bec'h a-walc'h, d'e dreiñ a-led e gein. Ar vaot-se, a oa tri zroataed hirder dezhi, a zlee bezañ pevar c'hant lur enni d'an nebeutañ.

— Mat ! a grias Nab, setu a laouenay hor mignon Pencroff !

Gwir e oa, ne c'halle o mignon Pencroff tremen hep bezañ laouen gant kement-se, rak saourus ken-ken e oa kig ar baoted-se en em vag gant glazid. D'ar poent-se ne leze da zamwelet nemet e benn bihan, plat, ledanaet avat en adreñv gant kavennoù daouividig bras, kuzhet dindan ur volz askornek.

— Ha bremañ, petra a raimp gant hor jiboez ? eme Nab. Ne c'hallomp ket e stlejañ betek Greunit House !

— Lezomp-eñ amañ, pa ne c'hall ket treiñ en-dro, a respontas Harbert, ha dont a raimp davitañ gant ar garrigell.

— Ententet eo.

Evelkent, bete-gouzout, e kemeras Harbert preder da c'hennañ al loen gant bili bras, ar pezh a oa diezhomm hervez Nab. Goude-se e tistroas an daou chaseour da Greunit House, en ur vont a-hed an aod, a oa dizolo-kaer neuze pa oa izel ar mor. P'en doa c'hoant Harbert d'ober ar souezhenn da Bencroff, ne rannas grik diwar-benn ar “standilhon kaer eus ar geloninaed” en doa troet en traezh war e c'henoù ; met div eurvezh war-lerc'h e oa distroet Nab hag eñ, gant ar garrigell, d'al lec'h m'o doa e lezet. Ne oa ket ar “standilhon kaer eus ar gelonianed” eno ken.

Nab hag Harbert a sellas an eil ouzh egile da gentañ, ha goude e selljont tro-dro dezhe. El lec'h-se avat eo e oa bet lezet ar vaot. Ar paotr yaouank a gavas ar biliennoù en doa graet gante zoken, ha, dre-se, e oa sur ne fazie ket.

— Ac'hanta ! eme Nab, gouest eo al loened-se da cheñch tu eta ?